

Or emañ

UR GANOL
SKINVEL
E
BREZHONEG



AR E

Brezhoneg

An dezougen
e Breizh

1991



Trugarekaat a ra Bremañ an holl re o deus graet profoù e-doug ar bloavezh 1991 ! 7405 lur a zo deuet ar giz-se da skozeleñ ar gelaouenn da zont er-maez. A-drugarez dezho e c'heller gwellaat tamm ha tamm doare ha danvez Bremañ.

- PROFOU : Hubert Willerm 200 L, Pierre Le Saux 50, Francis Menard 50, François Louis 150, Noël Peyr 100, Michel Manach 50, Françoise Jolivet 100, J.Lan Press 50, Michel Bertin 50, Soazig Lincoln 50, Marcel Rimpot 50, Iwan Kadoret 50, Patrick Girard 150, Dominig Kervegant 50, Herve Bihan 300, Paol ar Meur 50, Roger Bizien 150, Bernez Ar Moulleg 250, Tilly Yann Mikael 50, Erwan Vallerie 350, Yvon Bordiec 50, Jorj Gweggen 50, Yves Jardin 50, Robert Rannou 50, Jean-Yves Allain 50, Gladia Millour 50, Hughes G-B 50, Joel Daniel 50, Mikael Tregar 150, Marcel Droual 50, Jean-Louis Busson 10, Herve Masson 50, Viviane Auffret 50, Adran Yannig 50, Padrig Andreux 50, Gilbert Bitsch 100, Thierry Madec 50, Philippe Lanoe 50, Alexis Kondratiev 55, Gerard Baillood 50, Gwenole Gevel 30, Loiez Cleac'h 50, Elisabeth Coin 50, Yann Lug Jacob 50, Roland Mogn 50, Michel Beyer 50, Brieg Ar Menn 960, Erig ha Annaig Planezza 50, Evans Tewnyn 50, Yann Fanch Guillo 50, Yves Guillo 50, Bernez Cadoret 50, Daniel Kernalegen 50, Yves Caroff 50, Jean Yves Le Goff 50, Martine Ancelot 50, Loig Chapel 150, Christian Brisson 50, Lukjan Kergoat 50, Fanch Moullec 30, Naujokat Holger 50, Yann Moullec 30, Per Pennec 100, Per Digercher 50, Marc Guillou 50, Yann-Bar Salaun 50, Lukian Raoul 50, Per-Vari Kerloc'h 50, Fanch Dugast 50, Jakez Mèrel 50, Edith Orhan 50, Roland Vernisseau 100, Jorj Belz 50, Reun Le Hir 50,

Mikael Deligne 50, Frederic Gouarec 50, Guy Thoumelin 50, Gireg Konan 50, Loig Orhan 20, Anton ar Barzh 50, Johnson Llinos 50, Marie Françoise Lestic 50, Poulliquen 50, Didier Jegou 50, Youenn ar C'heur 50, Yann Puillandre 50, Yann Kerhuel 50, Sylvie Toupin 50, Gwenaëlle Dikelou 50, Amzer Nevez 50, Romuald Texier 50, Yann Ber Montreer 50, Roparz Carre 50, Jean-Pierre Le Grand 50, Philippe Sollicc 50, Louis Poisson 20, Andre Lavanant 50, Hugues Radenac 50, Yann Baol Kelvenneg 50, Loig Le Priellec 50, Robert Thébaut 50, Herve Bouche 50, Marcel Giraudeau 50, Yann Fanch Kerneis 50, Yann Fanch Olivier 50, François Louis 100, Marsel Rimpot 50, Yann Raynaudon 50, Noël Peyr 50, Yvan Le Gall 50, Yann Fanch Burlot 50. (7405 en holl).

Daoust d'ar skozele-se hon eus bet un toull 15 000 lur evit ar frejoù-moulañ. Setu : grit bruderezh tro dro deoc'h, kinnig Bremañ da lenn d'ho familh, d'ho mignoned, ha gwelloc'h c'hoazh : lakait anezho da goumanantiñ ! Mil trugarez evit ho skozele. Hor pal : 1000 koumananti evit 1993 !



Kinnig-labour e Roazhon

Emañ Skol-Uhel Ar Vro o klask war-lerc'h ur viskriver(ez) brezhoneger(ez) (gopret leun-anzer). Al labour a gogo d'ar tañ a viz C'hwevrer. CV + ul lizher emginnig. Posubl eo ha goulenn Annaig Renault, (e karg melestradurezh Skol-Uhel ar Vro)

Kinnig-labour DIWAN

Emañ DIWAN o klask danvez-skolaerien ha kelennerien evit distro-skol 92. Kas ur C.V. + ul lizher emginnig da zDIWAN, 29870 Treglonou, a-raok fin miz Genver 1992.

Pa weler hiziv pegen kliañ eo chadennoù skinwel ar gouarnamant gall (A2 hag FR3), ha pa weler ar 5-vet chadenn skinwel c'hallek o kouezhañ en he foullad dleoc'h, e c'haller en em c'houlenn hag en emañ SAB war gein e yac'han marc'h-argad gant e c'halvadennoù d'an emsaverien da vont da vanifestiñ evit ur chadenn skinwel vrezhonek.

Ha prest e vo an dilennidi a ro o sinatur da SAB da reiñ ivez an arc'hant a vo ezhomm ?

Lavaret e vo dimp n'eus bro ebet a c'hallfe tremen hep ar skinwel evit difenn he yezh, ha degaset e vo skouerioù Euskadi, Kembre ha Katalonia, broioù dezho muioc'h a emskiant vroadel, a emskiant yezhel ha vihanañ, hag a emrenezh bepred... C'hoant am eus neuze da respont n'eus hini ebet eus ar broioù-se he defe krogel gant he skinwel hep bezañ savet da gentañ ur skingomz en he yezh.

Aesoc'h e vefe kaout arc'hant evit ur skingomz vroadel eget evit ur skinwel a gousto ker-ruz, ha buanoc'h e vefe savet. A gredan, pa'z eus brezhonegerien war ar vicher-se, en RBI hag e Radio Kreiz Breizh da vihanañ.

Goude-se, e vefe arguzennoù gwelloc'h c'hoazh ganimp da c'houlenn hor skinwel brezhonek.

Alan Penng Roazhon

Skritelloù divyezhek, evel a zo reizh, a oa bet graet evit Gouel al Levrioù e Karaez.

Skritelloù gallek a zo bet graet evit ar gouel aozet en enor da Anjela DEVAL er C'hwerched. E peseur yezh 'ta e skrive "barzhed" Traoù an Doue?

Ur biakenn c'hallek an hini zo bet lakat ouzh dor ti ar c'h-CRIB (Centre Regional d'Information Bretonne), 30 leurgâr al Lisou e Roazhon.

Un anv divyezhek zo bet dibabet gant ar gevredigezh marc'houarnerien roazhonat "Route bleue-Hent glas".

Mark Kerrain, Roazhon

Kenvroiz ker.

Ho saludiñ a ran hag e ran va mad eus al lizher-mañ evit adkoumanantiñ da v(Bremañ), pezh a oa dibosubl din dre ziover a c'hreifol betek bremañ. (N'on ket gwall binvidioc'h hiziv met start eo tremen hep lenn Bremañ, surtout pa vezer pell eus ar Vro ! J'entend em eus ha goulenn da "azasaat" B.T. Faizan. N'ho kasin ket da sutal, evelkent !

Emmanuel Legent Bordeu

Stourm ar Brezhoneg evit ur ganol skinwel e brezhoneg Manifestadeg e Kemper



400 den deuet da vanifestiñ e stradoù Kemper d'ar Sadorn 28 a viz Kerzu

Tost da 400 den o doa kemeret perzh er vanifestadeg aozet gant Stourm ar Brezhoneg e Kemper d'ar Sadorn 28 a viz Kerzu 91. Bloaz war-lerc'h manifestadeg Brest, hag un nebeut mizioù goude ar c'hemmoù a oa bet e penn abadennoù brezhoneg FR3-Roazhon, e oa bet diskouezet plann eo niverusoc'h-niverusañ dilennerien ar brezhoneg a venn gounit ur chadenn skinwel e brezhoneg. Kerzhet o doa ar vanifesterien e stradoù kozh kreiz kêr Kemper, en ur huchal luganioù e brezhoneg. Un toullad strolladoù o doa galvet o ziliz hag o mignoned da gemer perzh e manifestadeg Stourm ar Brezhoneg : Diwan, a oar pegen pouezus e vefe kaout abadennoù skinwel e brezhoneg evit ar vugale, hag ar strolladoù politikel Frankiz Breizh, Emgann, U.D.B. ha P.O.B.L. bodet el listennoù "Pobl Breizh, ur pobl en Europa". Gant un ezel eus ar gevredigezh kembraek "Cymdeithas Cymru-Llydaw" ("Kevredigezh

Kembre-Breizh") e oa bet degaset da Stourm ar Brezhoneg ur sinadeg, warni tost da 800 sinadur dastumet e Kembre, a zegas harp Kembreiz da strivoù ar Vretoned evit ma vo savet ur ganol skinwel e brezhoneg. E dibenn ar vanifestadeg e oa bet distaget un tamm prezegenn gant kadoriad Stourm ar Brezhoneg, Herve Kerrain, a drugarekae an dud a oa deuet da vanifestiñ, hag a spisea un tamm goulennoù S.A.B. (sellet ouzh an destenn p.4) Er mizioù a zeu e kendalc'ho Stourm ar Brezhoneg gant e stourmadeg evit ur ganol skinwel e brezhoneg : dalc'het e vo da ozañ emvodoù foran du-mañ du-hont da vrudañ ar mennozh-se evel m'hoñ eus graet endeo e Kemper, Gwengamp, Roazhon, Lesneven, Montroulez, hag all, ha goulennet e vo digant al listennoù tud a vo war ar renk evit an dilennadegoù rannvro embann o soñj war ar poent-se ■

Iwan Kadoret

Skinwel Brezhoneg un dra ret evit hor bugale

En ur ober pemzek vloaz, Diwan he deus gounezet he fariadenn : krouñ dre ar skolioù ur rummad nevez e vrezhonegerien. Hiris, un tammig e pep lec'h e Breizh, tud yaouank a gomz hag a ziviz etrezo e brezhoneg. N'eus ket kalz anezho c'hoazh met an holl a oar emañ ganto dazont hor yezh.

Ar gwir o deus ar re yaouank se da c'houlenn groñs hirio diganeomp kaout ur chadenn skinwel e brezhoneg rak ezhomm o deus bevañ ar yezh war ar pemdez, er-maez eus ar skol ivez evit ma teufe da vezañ o hini da vat. Un tamm eus o buhez eo ar skinwel, n'eus forzh penaos. Hor giritegzh eo e vefe ivez ur benveg o sikouro da gemer o flas e-touesk ar vrezhonegerien ma vo bev enni ar brezhoneg ha sevenadur Breizh met diskouezet en un doare nevez a glotto gant ar bed a vremañ hag a c'hello dedennañ un niver bras a dud.

Diwan a c'houlenn eta digant e ziliz hag e vignoned brudañ menoz ur chadenn hollvrezhonek, evidomp-ni ivez ez eo ur stourm a-bouez.

Diwan Breizh


Prezegenn SAB

«Nac'homp bezañ bac'het e karc'har ar c'hultur "bihan"»

Bloaz zo e oamp o tiskenn dre stradoù Brest evit reiñ ul lusk kentañ d'ar stourm evit gounit ur ganol skinnel e brezhoneg. Bloaz war-lerc'h e c'hallomp bezañ lorc'h ennomp o welaout an niverusoc'h m'emaomp amañ hiziv, hag o welaout ivez an hent bet bouc'het, na pegen ledan, gant Stourm Ar Brezhoneg war-za ar pal-se.

bolliker a gement kostezenn a ve en deus sinet hor galv. Hogen ur c'hañs eo ivez ar stourm evit ar ganol skinnel-se, ar c'hañs da zivizout ha da zibab an dazond evit yezh ha sevenadur Pobl Breizh.

- Pesaut dazont d'hor yezh hag e pesaut stumm ? - Pesaut brezhoneg evidomp warc'hoazh : trefloedoù bastad diwar restajoù un tremenad maer pe yezh ur gwir gevredigezh troet war an dazont ? - Pesaut plas d'ar Brezhoneg, ha dre se pesaut plas d'ar galleg, a Breizh ?



Stourmerien SAB zo aet da stagañ gilonioù ouzho doriou tachenn Roch Tredouan d'ar Sadorn 21 a viz Kerzu

Brezhoneg, Bugale, Media.

Ur respont an hini zo bet gant UGB d'ar lizhiri d'ar Vinistred eus Breizh a-zivout ar mellad 17b eus Englev Etrevroadel Gwinioù ar Vugale. Skrivet en deus Loeiz ar Peñseg 'e oa bet heklav hon nec'h' dirak Ministr ar Sevenadur. Skrivet en deus ivez Yvon Bourges, prezidant Kuzul Breizh (spazhet en doa komzet ouzho Georges Kiejman ha rener FR3-BZH "a-zivout al lec'h dleet d'ar brezhoneg er skingomz hag er skinnel".

Loeiz Mahe

Breizh Unan

Fellout a ra d'ar gevredigezh Breizh Unan enebriñ ouzho doareoù ar c'hazetennoù pemdeziek a gomz eus "4 departamant Breizh" hep darc'hel kont eus lizhiri klemm al kermerien ha kevredigezhioù an emsav. Kinnig a ra Breizh Unan d'an emsaverien didrochañ (pe luc'hellañ) ar pennadoù a ra fae war Breizh ar 5 departamant, skrivañ warno "hep Naoned Breizh ebet" (pe traoù heñvel), ha kas ar pennadoù e goloioù didimbr da rennerien ar c'hazetennoù (hini O.F.10 rue du Breil, 35051 Roazhon, pe 5b, rue d'Alger, 44000 Naoned e Breizh).

Breizh Unan, 8 Strad Harouye, 44000 Naoned.

Panellou-hent

Lizher digor

D'an Aotrou Rener Renerezh an Avelñ Departamant Penn-ar-Bed Pal : panellou brezhonek war bord an hentou-departamant.

Aotrou Rener, Stourmadeg kentañ Stourm ar Brezhoneg a oa bet lakaet da gaout panellou-herc'hañ gant stumm reizh anvioù-lec'h hor bro war bord an hentou.

Abaoe ar bloavezhioù 1970 e oa bet goulnennet groñs gant kevredigezhioù breizhek. Ne oa ket bet tu da gaout gounid ebet eus ur stourmadeg o heuliañ lezenn ar Stad C'hall. Setu perak e oa bet divizet gant tud hor strollad, Stourm ar Brezhoneg, kas an traoù war-raok gant doareoù dileus en ur vastarañ ar panellou-hentañ, kouz re an hentou-Stad ha re an hentou-Departamant.

Goude bloavezhioù stourm, goude meur a brosez omp deus a-benn da lakaat Kuzulierien Adoù-an-Arvor da gentañ, re Penn-ar-Bed war o lerc'h, da zivizout lakaat sevel panellou-herc'hañ en hor yezh.

Darempredoù frouzhus hon eus bet gant diennid Penn-ar-Bed ha gant ho servijoù ivez ; abaoe penn kentañ ar bloaz-mañ e c'heller gwelaout panellou brezhonek etre Kemper ha Pont-n-Abad. An dra-mañ a ziskouez e c'heller kentañ war tud a youl vat e Kuzul Departamant Penn-ar-Bed hag e-touez Renerezh an Avelñ.

Siwazh e vez savet c'hoazh gant ho servijoù panellou-hent stummoù gallek hepken warno.

Kontrol ma'z eo da gement kaoz a vez embannet ganooc'h ha gant departamant Penn-ar-Bed a-zivout dienn hor yezh e tiskliromp kement-mañ :

N'eo ket dalc'het ken Stourm ar Brezhoneg gant an arsav-brezel bet o ren etrezomp ha Departamant Penn-ar-Bed ;

Adkregiñ a raio eta Stourm ar Brezhoneg gant mastaradegoù evel gwechall ;

Ne baouezimp gant ar stourm-se nemet pa vo diskouezet anat youl Departamant Penn-ar-Bed hag hini Renerezh an Avelñ da zoujañ d'hor yezh.

Gant hor gwellañ gourc'hemannoù.

Stourm ar Brezhoneg




E bro Astur ivez ez eus bet renet ur stourmad a-benn reiñ ul lec'h deraet da yezh ar bobl war ribl an hentou. Sed amañ ur skouer eus disoc'h ar stourmad : Uviéu, stumm asturek anv ar gêrbenn lakaet a live gant ar stumm Kastilhanek, Oviedo. Evit an anvioù all a welaer war ar panell, ne oa kudenn ebet :

stummoù asturek rik ez int. Evit a sell parrezioù bihan ne vez ket graet peurvuiañ ar seurt sotonioù a gaver re stank e Breizh-Izel - an anvioù peuzheñvel en div yezh a vez lakaet dindan o stumm asturek nemetken.

Gw.E.

Skingomz 103,9 mHz

Abaoe 2 viz bremañ zo bet savet un abadenn vrezhonek war "Fréquence-Mutine" e Brest. Bep Sadorn etre 11 eur ha kreisteiz o deus ar blijadur da glevet al Leoniz, Kristian ar Bras, animatour an abadenn nevez "Kaoi-Teol". Kaoi-Teol a ginnig deoc'h kaleier lec'hel, roll an abadennnoù hag an diskouezadegoù a vez barzh ar vro, muzik hag ur pennad-kaoz gant un dan pedet (kouz laret da bep abadenn). Evit selaou lakaat ho post war 103,9 mHz. Ha ma fell deoc'h mont e darempred gant Kristian pellgomz d'an niverenn-mañ : 98.05.09.11.



Kemennadenn

E-giz hor c'hindirvi a Vro-Gembra, lwerzhon pe Skoz -hep disoñjal ar Gatalaniz, an Euskariz, ar Flamañdiz ha, Breizh, pa n'em sant tud stag outl, a rank kant deroù ar c'hentañ kantved war'n ugent, kaout ur frammadur dre selled-ha-klaved mod-nevez, gouest da geveriñ ha da vezañ kradus evit da Vretoned kouz hag evit an Europeiz. Stal skingomz ha skinnel Breizh koulz ha digoradur ar vro war ar re all (Kelted, Europeiz), ha dre se reiñ lañs ha bodañ "sturtijenn" an armerzh hag ar politikerezh an Breizh, dezhi da greñvaat he flas an Europa.

Eus a Vreizh da Europa, ur c'honstriverzh war dachenn "ar selled ha klaved" evit an holl dud e Breizh. Przegenn-diviz kaset en-dro gant : Alain Bienvanu, Rener Acort Breizh Loeiz ar Beg, Istourour D'ar Sadorn 18 a viz Genver 1992 da 2e.30 d'endev Palez ar Gouelioù, sai niv. 5, An Oriant.

Trouz gant ar simidi en Oriant Dilabour er porzhioù



Straod porzh Kergroaz enket gant ar simidi



Kendalc'het 'vez gant an harz-labour

Kinniget ez eus bet ur statud nevez d'ar simidi gant an Aotrou an Drian, Sekretour-Stad ar Mor ha Maer an Oriant. N'emañ ket sindikad C.G.T. ar simidi a-du ; hervezo e c'hellfe an doareoù nevez degas dilabour er porzhioù. Diskregijñ eus o labour ha manifestiñ 'vez graet ingal gant ar simidi. Bet int bet, da skwer, betek sez ar P.S. gall da ziskouez o fulor. K.a.D.

Kemennadenn gant F.O.

Setu'z eus bet votet er skolioù Diwan evit dilenn dileundi ar c'hopidi d'ar 4 a viz Kerzu 1991. Ma oa bet kemennet d'ar sindikadoù d'an 21 a viz Du ha gouennet outo dont da sinañ an emglev da gas da benn an dilennadegoù d'an 28 a viz Du, ne oa deut benn ar fin d'hen ober war a seblant nemet FO hag ar CFDT ; met pa c'houmas avat kannad FO hag en nije gallet gwelet roll ar c'hopidi da skignañ kinnigoù dezho, e nachas ar rener hen diskoaz war zigarez vije bet kontrol dur vamedigezh bet douget en ul lezvarn benrak ! Lakaomp ! Met daoust hag en ne gas ket seurt emzalc'h da virout ouz mennozhioù disheñvel da

gavout o hent e diabarzh Diwan ? Ur wech c'hoazh ne vo war ar renk nemet ul listenn kinniget gant ar CFDT. Chalus eo kement-se, 'gav ket deoc'h ? Rak penaos eta vo ledanaet an dachenn sokiolel a vez o sikour Diwan hep na vefe digemeret herstennoù all, kinnigoù da z'fenn ar c'hopidi ? D'ur mare ma vez mogenioù o kouezhañ diouz o fahz, poent bras digenit an nor d'an eskemm-mennozhioù ! F.O., anezhi ur sindikad dizalc'h diouz ar Stad ha diouz kement strollad politikel 'zo, a vez un tamm mad disheñvel he dilennadennoù, he

c'hinnigoù, he falioù diouz re ar CFDT, anat eo, dreist holl pa'z eo deut honnezh da vezañ muioc'h-mui ur sindikad ofisiel, siwezh deomp ! Rak-se e kinnig d'ar re zo gopret e Diwan ha da gement hini nefe choazh mont e darsmpred ganeomp-ni ha gout muioc'h diwar hor penn skirvañ pe bellgomz ha gwelloc'h c'hoazh ; penak ne zafent ket d'hor gwelet :

UL FO - 45, strada ar Providaie 29000 Kemper Pg : 98-55-69-04


Ha brazhonegñ m'ho pefe c'hoant ober, gouennit warlerc'h per Van KERLOCH

Fulor

Fuloret an Aotrou Kofi Yamgnane, Maer Sant Kouli hag ezel eus gouarnamant Bro-C'hall. Deuet e oa saverien chatal da vanifestiñ dirak e di-kêr. Diskennet o deus an trivli ha torchet o deus o daouarn outañ.

Tarzhadennoù

Daou di a oad o sevel a zo bet damzistrujet war dro an 13 a viz Kerzu en Ardeven (Mor-Bihan). Eno e vez ar gompagnunezh Rotschild o sevel 20 annez evit an douristed. Treset a oa bet un triskell gant al lizherennoù "RB".



Ledonez Ruiz, gwerzhed d'an ostronian

Gweladenn ministr-kentañ Sina en India 250 repuad Tibetan bac'het e Delhi

Da gefver diwez "Bloavezh Tibet" ez eus bet bac'het 250 tibetan evit astommidigezh an darempredoù etre Sina hag India.

"D'an eizh a viz Kerzu e teuas poliserien dre laer e kamp ar repuidi tibetan, e Delhi-gozh, e-lec'h ma vev 2000 den ha paket e voe ugent den ganto e-touez pennoù hor relijion," eme sekretour ar greizenn gelaouiñ e strollad unvaniezh ar yaouankiz tibetan. Kement-se evit mirout outo a vanifestiñ enep Li Peng d'an 11 a viz Kerzu evel m'o doa raktreset. "Kavout a ra deomp ez eo un darvoud gwall nechu evit India a zo ar Stad demokratel brasañ er bed."

Evit pennadurezhioù India e oa "dic'houzafvus seurt eneberezh dre m'eo Li Peng ar c'hentañ Ministr-Kentañ a Sina a ya da Zehi abaoe 30 vloaz".

D'an 11, deiz ar vanifestadeg a voe graet memestra, e voe kraouiet 230 manifestad tibetan-all.

"Bac'het o deus hor bugale ha skoet ganto. Manifestiñ en un doare habask a felle deomp. N'omp ket evit implij an nerzh a-enep Li Peng," eme ur vaouez.

Yann-Varc'h Thorel



"Bac'het o deus hor bugale" (uc'hskeudenn a-ziv ar "Ouzhou Ribao")

Kosovo

An traoù o trenkañ buan

Pregat 'vez kalz eus Kroatia gant ar brazel oc'h ober e reuz du-hent. Ne vez ket laret pikol tra, avat, a-zivout Kosovo, ur rannvro "emren" eus Republik Serbia, gant 90 % eus hec'h annezidi o vezañ Albaniz.

Koulskoude eo bet torret emrenezh Kosovo gant gouarnamant Beograd. Nevez 'zo eo bet divizet lakaat anvioù serbat da straedoù Pristina (kêrbenn) ar Rann-vro, en ur dennañ kuit anvioù mare komunour Yougoslavia (Tito, Lenin, da skwer) pe anvioù albanat.

En tu all eus an harzoù e lavarer muioc'h mui e c'hellfe gouarnamant Tirana dont da lakaat e fri e-barzh aferioù Kosovo. Un doare a vefe evltañ da douellañ tud Albania, gwallskoet gant an naon hag ar baourentezh, en ur biantañ tan en diavaez.

K.an Duigou

90 miliard

Ar sammad arc'hant a vefe ezhomm da vagañ, lojañ, desavel ha louzaouiñ poblañs ar bed a-bezh a zo bet jedet da 17 miliard a zollaroù bep bloaz (90 miliard a lurioù gall). Ur sammad bras-spontus eo. Tost kement hag a vez dispignet gant prenerien armoù ar Bed BEP PEMZKETEZ...



BLOAVEZH MAT !



14vet Gouel Etrevroadel Filmoù ha Skinwel ar Broioù Keltiek


Kevredigezh Etrevroadel Filmoù ha Skinwel ar Broioù Keltiek, bodet anni 11 chadenn skinwel ha 200 produour dizalc'h, a zo o paouez embann e oa bet dibabet An Oriant evit derc'hel 14vet gouel ar gevredigezh e 1993.

Bodet e vo tost da 300 micherour war ar sell-dha-keved evit an darvoud-se ma legaso deomp ur genstrivadeg all etre ar broioù keltiek. Krefivaet e vo galvidigezh braizhek hag atrekliek An Oriant gant donedigezh ar gouel-se.

J.Y Le Touze

Ar c'helenn brezhoneg d'an dud deuet Kenderc'hel gant an diviz

Da heul an eskemm mennozhioù etre Mark Kerrain hag Herve Kerrain a-zivout kudenn a c'helenn brezhoneg evit an dud deuet, e kinnigan deoc'h da genderc'hel war an hent-se. Tennaet eo ar pajennoù da heul eus ar c'hendael bet savet gant KBDP d'ar 7 a viz Meurzh 1987 e Sant-Denez (93), "Peseurt stourm evit ar Brezhoneg ?" Hogen, da gentañ em bele c'hoant resisaat e savan a-du gant Herve Kerrain pa lavar ez eus endev eus ur framm kelenn evit an dud deuet, d.l.e. Stumdi. Ret eo gwelout a-gevret penaos kas pelloc'h ar gevredigezh-se ha chom hep ober teñt tomme kreizennou goudoret. Pet eus ar skolaerien (Diwan h.a.) a zo aet da labourat ha da gomz gant an dud war an dachenn ? Setu amañ eta, ar pezh a lavaran pemp bloaz a zo ... krennet eo bet an destenn orin moarvat.



... Rakis eo ar c'hendael-mañ, met ret eo deomp, ni, emsaverien ar brezhoneg, dont a-benn d'ober kinnigoù fetis, war verr dermen, ha praderiañ en ur steuñvenn saveteiñ evit ar brezhoneg(1) ?
... Doamp-ni, a-gevret, da bleustrin war hon obererezhioù, ha, perak ne vije ket, deomp -ni d'en em vrutellañ kenetrezoamp, mar bez ret ?
... Petra 'zo tu ober ez-fetis war an dachenn evit, da skouer, ar re yaouank etre 25 ha 35 bloaz, gouest da gompier hep komz evit an darn vrasañ anezho ? Ar vezh, hag an dispizir kiriek da gement-se ? Evit ar pezh a sell ouzh ar vrezhonegerien (50 vloaz hag ouzhpenn), kavet 'vez nebutoc'h-nebutañ anezho a ra gant ar yezh... Penaos neuze cheñch penn d'ar vazh ma n'eo ket gant ur steuñvenn saveteiñ hollek, kaset da benn gant yalc'hadou ar Rannvro hag ar gumuniezh Europat. Ret eo lakaat ar Rannvro da gomer perzh el labour bouc'h-gant departamantoù 'zo...". Bez 'ez eus tri live, d'am soñj, da vont ganti. Da gentañ, ur goustiñ evit ar gudenn-se. Ret eo lakaat ar JEU al labourerien sokial, ar vistr-skol, ar gennelvedezazien(2) evoljust. N'eo ket posupl kinnig d'ar re yaouank a zegouezher ganto, evit ober brav, war an tomm. Komz brezhoneg a-greiz-holl

dre c'hras ar c'hentelioù noz pa welont er yezh-se nemet yezh an argoll(3), yezh an amzar warlerc'hiet ha yezh ar vezh... En tu kontrol, dedannus eo al labour kaset da benn gant Strollad ar Vro Bagan daoust ma n'eo ket a-walc'h. Ret e vefe kaout dek, peotramant ugent Strollad ar Vro Bagan e pep lec'h, sevel stajoù ha krouidigezhioù a-stroll. Tu 'zo ober hep ar brezhoneg da gentañ en ur seurt labour gant aon ma teufe war wel skolioù santout(4). Hogen, un tu eo da gregin endro gant an eskemm, an diviz pa ouler ez eo klevived ar gomz a zo ar gudenn bennañ (gw. Daumer, Carrer ha reoù all).
"... Ret eo dilammañ an teodoù dre ar c'hontadennoù, ar mojennoù, an eskemmoù niverusoc'h etre ar vrezhonegerien, oadourien anezho, hag ar vugale da skouer (reoù Diwan, skolioù divyezhek h. a.).
Ar stajoù war ar maez, e ti an dud, a zo a bouez. E-barzh stern ur steuñvenn saveteiñ e ranke ar seurt stajoù bezañ dalc'het e pep lec'h ivez ha paeañ ar venajarian... Dont a ra e-giz-se ar brezhoneg da vezañ un dra brizius evito. Dre-se e oa deut a-benn K.B.D.P e Larruen, Kawan, Padarneg, Ploardud(5), da vuzuliañ cheñchamantoù gwirion etre tud an tiegezhioù diwar-benn o emzalc'h e-keñver ar yezh...".

"... Da eil, al lizherennaouegezh(6) Evel hel lavare Herve Kerrain, labour Stumdi eo se, nemet e vefe ret diorren ar gevredigezh. Ur bazenn gentañ a zo bet fizhet a dra sur.
"Memestra, mall a zo da sevel ur gendael gant ar gelennerien vrezhoneg, ar skoldi, ar gegeret, ar Rannvro a-benn en em soñjal war gudenn ar c'helenn. Da skouer, daoust hag eñ e c'heller kenderc'hel d'ober gant hentennoù na gilotot ket gant ar gwirvoud ?
Fellout a ra din lavarout e rankfamp holl a-gevret sevel hentennoù nevez, gwellaat hon doareoù da gelenn marleze... Da drede, lakaat an dud, ar vrezhonegerien desket en o yezh da reiñ un tamm deskadurezh d'ar re all d'o zro, evel lavare Reparz Hemon." Prest on, me da labourat war ur seurt raktres...
Serj Richard Kadoriad K.B.D.P
Teastenn orin ar brezegenn digant S. Richard, 70 straed J.P. Timbaud 75011 Pariz (e galleg eo).
(1) kinniget 'oa bet gant J.G. Segaud krouiñ ur lofs diazez evit ar brezhoneg ;
(2) ethnopsychiatres ;
(3) échec ;
(4) biocages affectifs ;
(5) stajoù savet gant KBDP war ar maez ;
(6) alphabésation

Ar c'helenn Brezhoneg e Bro Sant-Nazer Digoridigezh skol Diwan Sant Nazer


War-lerc'h kaozeadennoù hir gant an dud e karg eus aferioù ar c'helenn e kuzul-kêr Sant-Nazer ez eus bet kavet ur sal d'ober skol enni nepell eus kreiz-kêr. En ul lodenn eus ur skol (skol Jules Ferry !) gouestlet bremañ d'ar c'helenn evit an dud deuet, emañ lec'hiet Diwan.

Digoret e voe dorajoù ar skol d'an 10 a viz Gwengolo evel ar skolioù all. Ar skolaer, Yann Erwan Haspot, bet e Tregon e-pad un nebeud bloavezhioù, a zo un dan eus ar vro. Gentañ ha gant un nebeud tud all e oa bet krouet ar Strollad Skoazell dek vloaz a zo dja. Eizh bugel etre daou hanter ha pemp bloaz hanter a vez ingal. Daou vugel ouzhpenn da nebutañ a vo achon da vloaz. D'an 30 a viz Du e voe profet ur banne a enor gant servijoù an Ti-Kêr. Ur c'hant bennak a dud a zeuas, en o zouez stourmerien a-

viskoazh, aet war an oad bremañ, na oant ket bet gwelet bloavezhioù a oa. An dilennidi a oa deuet niverus ivez. Pevar anezho a oa aze : an Itronazed M. Bruno, M. Bouillé ha M.M. Dielangard (bet kannadez) hag an Aotrou Mauduit (e karg eus ar c'helenn er C'huzul-Kêr). Tro o devoe eta da glevet choantoù Diwan e-keñver dazont ar skol !
Berzh eta, ar pezh ne viras ket ouzh Ouest-France da embann e oa bet digoret ez-ofisiel eil skol Vrezhoneg Broioù al Liger. Biskoazh kemend-all !
Ar Brezhoneg en Deskadurezh Stad
En desped d'an diaesterioù, drastus evit ma vefe kelennet hor yezh en ur doare dereat (da lavaret eo da nebutañ par d'ar yezhoù all !) ez a ar c'helenn brezhoneg war-raok a-nebeudoù e korn bro S.Nazer a-drugarez da labour an APEEB en departamant. Pell-mat emañ c'hoazh Yann diouzh e gazeg avat.
Graet e vez skol vrezhonek e daou skolaj e S.Nazer, e skoloajoù ar Baol, ar Poulligwenn ha Gwerriann. Un tammig pelloc'h war-zu Naoned e vez kentelioù brezhoneg e skoloajoù Blaen, Kordemaes ha Saveneg hag e lise Saveneg. Da lavaret eo, en tu all da gant skoliad. Spi a zo e kresko niver ar skoldi hag an eurvezhioù kelenn a-benn bloaz. Gant ma vo graet al labour titouriñ ar skoldi hag o c'herant gwelloc'h eget ar bloaz-mañ gant renieren skoloajoù a zo.
Skoldi Naoned hag ar chumunioù tro-dro n'o deus ket bet an hevelep chañs - ma oa bet roet eurvezhioù da liseoù ha skoloajoù 'zo n'eus ket bet klasket ur c'helenn d'o seveln !

Kentelioù Noz
Krog eo Strollad Skoazell Diwan S.Nazer d'ober skol noz da dud deuet. Lakaet e vez an dud da baeañ. An hevelep priz eo ha pa vefe 4 den eus ar memes familh o tont. Lod, evel just, a ro muioc'h (harvez c'hoant ha pinvidigezh an dud eo). Daou strollad a zo : an eil evit ar re n'ouzont netra hag eglie evit ar re a oar kalz (brezhonegerien ez-vihan anezho o deus c'hoant deskin lenn ha skrivañ) pe nebutoc'h (ur bloavezh studi dre gentelioù noz). A-benn bloaz e vazo moarvat tri strollad. Evit ar poent ez eus un darempt gant an Ti-kêr a oa bet ranket a-nevez a-benn obten saliou-skol pa n'oad ket bet aotret d'ober skol e Ti ar Bobl e-giz warlene. Ur gevrat hon eus sinet gant servijoù ar C'helenn eta.

Ar C'huzul Departamant o Sevel a-du gant ar Brezhoneg
Emañ Kuzul Departamant Liger Altantel o paouz reiñ da c'hrouzout e sav a-du gant kelennadurezh ar brezhoneg ha savenadur Breizh e skolioù an departamant. Embann a ra ivez e c'hoant da welet ul lazenn-stur mouezhiet gant Breudoù Bro-C'hall a lakafa splann gwirioù ar yezhoù er c'hwezh-kogn.
Laozrañ Motrot



An dilennidi Mauduit ha Bruno dogemeret gant Y. Janneron (kadoriad an AEP) ha Y.E. Haspot (skolaer)

Diskar an dezougen e Breizh Dre dren pe dren

Pa weler ar stad vantrus m'emañ Kreiz-Breizh, ez eus peadra da glask abegoù an divroañ hag ar paouaraat. Piv an diaoul a yafe da staliañ ul labouradeg hep bezañ sur da zezougen aes ha marc'had-mat an danvezioù ret hag ar produoù.

Pouezh an Istor


Dishouarnet Rouedad Vreizh, releg un amzer bet, a lavarfe lod, e c'hortoz tud Kreiz-Breizh ar gourhent eus Roazhon da Gastellin a oa bet prometet dazho. 24 bloaz diwezhatoc'h emaint o c'hortoz c'hoazh ! Nag a boan evit sevel un nebeud pennadoù gou !
C'hoarvezet e oa evit an eil gwech ar pezh a oa bet da geñver savadur al linenn hent-houarn Roazhon-Brest. Berroc'h ha kuitex a bontoù bras e vije bet kas al linenn dre Loudieg ha Karaez, hogen ne deurezas ket kêrioù an Arvor bezañ dilezet nag an eil gwech nag eben. Marteze a-walc'h e vo savet un hent-tizh dre Greiz-Breizh a-raok fin ar c'hantved, hogen re ziwexhat e vo.

An tren tizh bras : chañs pe walleur evit Breizh


Gant donedigezh an tren tizh bras (TTB) e teu da vezañ anat n'eo ket framm etevit al linennou Roazhon-Brest ha Roazhon-Kemper gant an troidellek ma'z int. Ha pennadrezhioù an Arvor o klask lakaat da sevel div hentenn TTB a-hed an aodoù. Divizet ez eus bet e vefe krouet linennou nevez etre Ar Mañs ha Roazhon hag etre Ar Mañs hag Angers.

Gwelloc'h e vije bet sevel ul linenn eus Ar Mañs betek Kastell-Brient hag alese teir skourenn : an eil war-zu Naoned, an trede da Reudon. War an taol e vije bet krouet ul liamm etre an div gêr vras Gorre-Breizh. Eus Redon ez eus buantre da Wened ha da Sant-Nazer war un dro.

Pa weler steuñv ar Rouedad nevez emeur o sevel e Bro-C'hall, e vezler ne vo ket cheñchet e framm hag e bal : ret vo tremen dre Bariz pe he bannlev e vo tremen dre Bariz pe he bannlev evit mont d'un eil bro d'eben. An tren tizh bras, a c'hellfe bezañ ur banveg evit diorren, a servijo kentoc'h da vougañ ar broioù paour. Raktres TTB



Al linennou - houarn e 1960



Al linennou - houarn e 1991

an Aberioù n'eo ket bet degemeret evel-just. A-benn nebeut e vo buanoc'h mont eus Roazhon da Naoned dre Ar Mañs eget dre Reudon !

Diskar ar rouedad kozh

Trelatet gant TTB, ne fell ket d'an SNCF pleustriñ gant al linennou bihan. Ne vane ket kalz anezho e Breizh avat, dreist-holl e Goueled-Breizh.

Paouezet gant an dezougen beajourien 20 bloaz 'zo, eo bet ehanet gant an dezougen marc'hadourzh war an darn vrasañ eus al linennou unroud a chome c'hoazh e Gorre-Breizh : Plouarzel-Kistraberzh, Lannvroeg-Maouren, Mazag-Gwer, Gwizhurieg-Gwerc'h... Ha n'eo ket echu. 40 ti-gar a zo bet serret abaoe miz Genver e Breizh ha n'ouspet re all a vo diskaret er bloavezhioù o tont.

N'eo ket an trenioù gorrek diouz ar c'hiz ken hervez an SNCF. Al labouradegoù a bleustre gant an danvezioù ponner e vo rat dilojañ pe serrñ da vat. Paouroc'h e vo maezioù Breizh.

Kiri-samm ouzhpenn a stanko hentoù ar vro. Priz an arakaat a lavaro lod. Broioù-ze, evel an Alamagn, o deus dibabet heuliañ ur politikerezh eus an dezougen dishañvel-krenn avat : da batra e servije kaout ur gêrbann divent evit ren war ur vro c'houllo ha marv ? Evel ma skriv Reun an Hir en e lev'r "Dre hent pe hent" "Daoust pegen fall bennak e vo treset al linennou-houarn gwechall ez eo ret-mat deomp ober ganto an'dez a hiziv. Evel m'emaint emaint, siwazh." Tu zo da kredif e vo serret an holl linennou unroud a-raok fin ar c'hantved, nemet marteze ar re Landerne-Kemper ha Dol-Lambal.

Kinnigoù evit ur politikerezh all

Marv Goueled-Breizh, ha n'eo ket Kreiz-Breizh nemetken, a zo skrivet etre linennou ar raktresoù savet gant gouarnamant Bro-C'hall, trellet gant ar c'hoant kas da bann Pariz evel brasañ ha buhezekañ Kêr Europa. Mennozhioù Loeiz XIV n'int ket marv !

Al linennou bras

Kentañ tra d'ober a vefe pouezhañ start evit ma vefe savet ul linenn tizh bras eus Roazhon da Gornog Breizh (Kemper ha Brest) dre Loudieg ha Karaez, hag unan all etre Roazhon ha Naoned. Patra 'dalvezfe an aerborzh etrovadell a fell da lod savet e Kreiz ar Vro ma ne vefe ket eret ouzh kêrioù brasañ Breizh. Karaez, da 20 munutenn diouz Kemper, Brest ha Loudieg, a c'hellfe dont da vezañ neuz ur greizenn vras evit Breizh-tel a-bezh

gant ur skolveur ha servijoù niverus. Al linenn Brest-Naoned-Bourel, anezhi al liamm nemetañ etre Breizh hag Europa ar C'hreisteiz, a ranko bezañ nevesaat ivez.

An adlinennou

N'eus ket tu merañ al linennou bihan savet tregont bloaz'zo : an ezhommoù zo deuet da vezañ dishañvel. Ne dalvezfe da netra deservij an distañ kêriadenn hiziv an deiz. Liammañ



Manifesterioù e Plouared

kêrioù bihan pe etre ouzh ur geoded vras buan hag hep didrenañ eo pal nevez an adlinennou. N'heller ket anzav ez eo sevenet ar gefridi-mañ gant an darn vrasañ anezho e Breizh. Kompren a reer perak int en arvar eta : ouzhpenn un eurvezh a zo ret evit mont eus Karaez da Wengamp ha ret e vo deoc'h didrenañ evit tizhout ST-Brieg.

Gwazh a se linennou a gote gant ar pal-se a zo bet serret ha dishouarnet zoken evit lod anezho : Kemper-Douarnenez, Kemper - Pont-n-Abad, Naoned-Kastell-Brient pe en arvar da vezañ evel Montroulez-Rosko. Sotoc'h eo c'hoazh pa vezler emañ aerborzh Kemper war an eil ha porzh nevez Rosko war ar pevare. Peloc'h emañ reizher politikerezh an dezougen e Breizh. Ma n'eo ket frammet a-zoare rouedad linennou Hor Bro, e vezler o deus hor c'hêrioù ur chañs bras memestra : emañ an tiez-gar e kreiz-kreiz pep hini anezho rak an amzer ma voent

savet e oa distar ment hor c'heodedoù. Dav eo deomp tennañ un implij eus an dra-se ha chom hep distrujañ an nebeud adlinennou a van c'hoazh.

Al linennou evit an douristed

Pa vezler pebezh berzh a ra an trenioù bihan dre Europa a-bezh, koulz en Aostria hag en Okitania e chomer mantret o welet n'omp ket bet gouest da virot an distañ linenn douristed war zouar ar pemp departamant. Tostoc'h ouzimp ez eus bet saveteet un nav lev bennak eus al linenn gozh Kaen-Fiers.

Hor breudeur tramor o deus graet kalz mutoch. Savet o deus linennouigoù a-raok. Pegen souezhus ha piljuz e vez klavout c'hwitiladennoù ha grozmoladennoù marc'h-du Pont-y-Fynach e-kêr ar c'hentelioù kembraeg en Aberystwyth.

Chomet oa hor frioù-ni war ar gloued pa voe diskaret ar Rouedad Breizhat. Ul linenn evel Kastellin-Kameled a droueze drammweloù kaer-meurbet Ledenez Kraozon, eus an eil penn d'egile, en doa un dalvouddegezh touristel dreist. N'eo ket bet gwall awenet kêrioù al Ledenez lezel dishouarnañ anezhi !
Emaur o savaniñ ar memas tra e Breizh-Uhel : Felger, Kastell-Brient, Plouarzel o deus kollet ar rouedadigoù a c'hronne anezho. Al linenn gozh Lannvoaneg-Plouarzel-Kistraberzh a heuilhe traonienn an Ivel, a droueze lanneier Lanvaoz a c'hellfe bezañ saveteet. Linenn ar c'hastell (Naoned-Kastell-Brient-Gwerc'h-Gwizhurieg-Falger-Pontorson) a liamme kêrioù kreñv reter Breizh a zo bet dishouarnet pennadoù anezhi dija. A-benn bloaz pe zaou e vo paket an tan ha gwerzhet al ludu ! Dishouarnet e vint penn-da-bann.

Gant ma kompreno kêrioù Gorre-Breizh e c'hell kas war-raok al linennou-se o skoudeñ a-raok ma vo re ziwexhat. Politikerezh an dezougen 'zo bet unan eus an abegoù o deus miret ouzh Breizh diorren heneuz. Gant ma vo komprenet gant an holl Vretoned !

KOUMANANTIT BUAN :
180 LUR/BLOAZ
ESTREN-STAD 230 LUR
12 NIVERENN
KOUMANANT-SKOAZELL
ADALEK 200 LUR
8, STRAED HOCHÉ,
35000 ROAZHON

Enklask war an Okitaneg Disoc'hoù sebezus

Fier ruz e oa Jacques Blanc Prezidant "Languedoc Roussillon" o kinnig, d'ar 4 a viz Du, disoc'hoù an enklask gourc'hemennet gant e servijoù a-zivout an Okitaneg. Splann, sklaer ha resis eo al labour : 1 den diwar 2 a gompren, 1 den diwar 4 a oar komz okitaneg.

Divizet eo bet kas da benn an enklask-se gant ar rannvro-hec'h-unan, o fiziout al labour en ur stal eus ar vro "Media-pluriel".
"Ar Stad ne heuilh ket, poan hon eus da sankañ e speredoù an dud e kang ar gouarnamant, birvidigezh hon yezhoù ha sevenadurioù" a lavar Jacques Blanc "hag evel just politikerezh ar Stad n'eo ket neptu". An enklask-se eta a servijo da ziazezañ muic'h c'hoazh obererezh ar rannvro, ha d'e lakaat da glotañ, gant an ezhommoù diouzh un tu, ha c'hoantoù an dud diouzh un tu all.

Un doare skiantel
998 den eo hag a zo bet goulenmataet, da lavarout eo tud o chom er pevar departamant eus ar rannvro lec'h ma 'z eus okitaneg (katalaneg o vezañ er pempvet). Er fin eo 939 den a zo bet dalc'het. Implijet eo bet doare skiantel ar c'hotaioù : ar reizh, an oad, ar vicher, an departamant bevañ, ar gumun mui lec'h an takad e-keñver ar rannvro (an oad, an diabarzh h.a...). Rannet eo bet evel-henn an dud : 314 ar gard, 425 en Herault, 99 e Lozère, 160 en Aude, 48 e pempvet, 52 e merched. Un den goulenmataet a "dalv" dre vras 1865 den an e zapartamant.

Komzet e vez Okitaneg gant mignonned er c'hafedioù.
Un den diwar zaou a zisklar kompren okitaneg da lavarout eo 15 % a gompren dre vras, ha 33 % a gompren aas pe mat-tre zoken. 11 % e-touez an dud etre 18-24 bloaz ha 55 % evit ar 65 bloaz ha muic'h.
Un den diwar bevar a lavar e oar komz okitaneg (16 % mat, 6 % evit un diviz beñ, 6 % un tammig).
(An tri c'hard eus an dud a gomz okitaneg n'int ket direnket evit an ober (72 %). Lod koulskoude a ansav o deus un tamm poan dre ma ne vestroniet ket a-walc'h ar yezh (22 %).
(Komzet e vez okitaneg gant mignonned (54 %) ar familh (49 %) gant an dud kozh (44 %)... Kreskiñ a ra ivez niver an dud dre ma pellaez eus ar c'harioù bras war-zu diabarzh ar vro.



(E-touez an dud a gomz, an tri c'hard a oar lenn, hag ur c'hard eus ar re a oar lenn a oar skrivañ.
(Un drederenn eus an dud gouest da gomz a implij alies pe bemdez an okitaneg : 9 % eus ar boblañs.

Ur c'hoant deskiñ
420 000 den, ur c'hard eus an dud er rannvro a garfe deskiñ okitaneg, hag 1.400 000 (80 %) a vefe laouen ma vefe posupl evit an holl vugale deskiñ ar yezh er skol ; pa vez goulennet outo hag-eñ e karfent e vefe desket gant o bugale 50 % a lavar ya, 25 % a lezie ar vugale da zibab.
(Ma seblant anat ez eo bet desket okitaneg gant ar familh evit 86 % eus ar re a oar, hep divizout deskiñ e kaver 85 % e touez ar re ne gomprenont ket ha n'o deus morse bet tu abat da zeskiñ.)
(Un den diwar zaou a zo stag ouzh ar yezh, 61 % eus ar re ne gomprenont grik o deus un emzalc'h pozitivel, 20 % unan negativel. Da skouer an tri c'hard eus an dud a zo a-du gant panelloù diyezhek hag unan diwar zaou a lavar e vefe ret mont pelloc'h eget ar panelloù nemetken.

Daoust d'an enklask-se bezañ bet kaset war-raok evit anavezout da gentañ stad ar yezh, e ro kalzik a efennoù ouzhpenn-se. Souezhet bras ez eo bet enklaskerien "Media-pluriel" gant emzalc'h an dud, dreist-holl gant ar fed n'o deus kejet gant den ebet hag a vefe savet nag a-du nag a-enep groñs. Plijet int bat ivez gant an enklask-se, diaes da aozañ met divoutin ha dedennus evito o-unan. Lavarout a ra Etienne Hammel, karget eus ar yezh er Rannvro : "A dra-sur, ma vefe bet graet an enklask se gant un aozadur sevenadurel, an disoc'hoù ne vefe ket sellet outo e memes-mod, pouez ar rannvro a zo aze."
Disoc'h kentañ : divizet ez eus bet gant ar rannvro kreskiñ ar budjez gouestlet d'ar yezh ha d'ar sevenadur e 92 ; pignat a raio da 6 milion a lurioù e-lec'h 5 e 91. Dedennus e vefe avat gwelout seurt enklask kaset war-raok er Rannvroù all en Okitania, evit dont a-benn da gaout sifroù evit ar vro okitan a-bezh. Daoust da se "Languedoc-Roussillon" a ziskouez an hent evit mont war-zu termenij ur gwir bolitikezh evit ar yezh.

A.V.C.

DEUG Okitaneg

Setu amañ un nebeut keloier diwar-benn Okitania ha Gwazkonnia evit bout resisoc'h : krouet o deus un DEUG Okitaneg amañ e Fossac. Abaoe pell amzer o veze argoulennet. N'eo nemet un DEUG daoubennet avat.

Anv an diplom-se a zo "DEUG lizhiri modern-Okitaneg". N'eus nemet ar bloavezh, kentañ o vont en-dro evit bremañ. Un 13 bennak a dud a zo enskrivet en DEUG. Setu roll an Unveziou-studi a ya da ober ar c'horf anezhañ :

- U.S. lennegezh c'hallek arnevez ha kempred (5 eurvezh)
- U.S. denesadur ouzh yezhoniezh ar galleg (2 eurvezh)
- U.S. 1 Okitaneg (3 eurvezh)
- U.S. lennegezh Ok modern ha kempred (3 eurvezh)
- U.S. sevenadurezh an Henamzer ha reizhiad (sistem) al latin (4 eurvezh) pe denesat ouzh al latin (2 eurvezh)
- U.S. a wir zibab (da skouer : sinaeg live 1, 5 eurvezh) pezh a ra an holl ma kemerer an U.S.00 menegel a-us :
- 6 eurvezh Okitaneg ha 16 eurvezh danvezioù all (7 eurvezh gouestlet d'ar galleg). Hag ouzhpenn-se eo kelennerion-lise a ro ar c'hantelioù war ar gaskoep, evel-se int rediet da ober o c'hantelioù, an holl anezho d'ar mercher, hag ez eus ur gentel war ar galleg e-pad ur gentel Okitaneg... Na lavarit ket ez eo graet a-rotoc'h pe dibalamour kaer avat tudou, bez' e

fazifec'h o trouksoñjal e-giz-se ! Arabat eo bezañ tagnous evit-se peogwir eo brav d'ja e vije eus an DEUG-se ; klevet zo bet kelennerion o lavarout n'eo ket ur yezh an okitaneg ! "franchimandajiras" (tud o traveziñ gallegac'herien an Norzh) eus ar Skol-veur ; ne dalvez ket ar boan gouzout piv int na tamall tra dezho, ne reont netra nemet heklivñ ragac'herezh nuli ar savboentioù ofisiel pa damofisiel diwarbenn "Kreisteiz"...

Tabut a zo bet savet etre an dud-vat-se ("ocitan", "qu'es agor ?" petra eo an dra-se ?) hag ar re kalsouet gwelloc'h, a-zivout gwirvoudeliezh yezh an "trobarodos". Un drez eo soñjal e c'hallez c'hoazh magañ tud zo un arvar bennak war an devoud-mañ ! Pa soñjer e veze skrivet ha komzet barzhonegoù kaer-meurbet e yezh-veur-se gant tud ken gailoudek ha dug Akwitania (Gwilherm IX Poitiers - Poitiers, da skouer) pe roue Bro-Saoz (Richard d'or de Lion), ha n'en dije ket kemeret e blieni da gembrañ gñ pe da ouzeloññ avat, kement-mañ o reiñ da gompren deoc'h pebez sked ha levezon a veze er Grenamzer gant ar "Provañsaled" evel ma iaret da neuze, mamm d'ar c'hatalaneg ha d'ar okitaneg a-vevemañ, gant koshañ lennegezh e yezh "voutin" Europa (da lavarout eo strateg latin pe gregaj), brud a skine war Europa a-bezh a-drugarez d'ar "quatre cent tradocora que

portèn la votz nostra depuïsh la Catalonha d'ine a l'arribra deu Danubi", ar 400 barzhkaner a gas hor mouezh eus Katalonia betek glann ar stêr Danav ; eme Miquèu Grosclande, ur Gall okitanekaet anezhañ ha den douget bri dezhañ gant meur a hini er vro-mañ. Ha na zisoñjomp ket an Nobel aet gant mistral e deroù hor c'hantved !
Ret leveret, siwazh, e vez klevet gwiallies "trafoedaj a zeu ganin" gant tud ar vro, kentoc'h evit "gaskouneq", "lemouzingneq"... pe "okitaneg". Eledus eo bet ar pikol bitrak anvet "Francè èternelle" da buluc'hañ koun ur yezh a zo bet ofisiel (er c'hontrol d'ar brazhoneg) er broioù-mañ betek 1539 pe 1621 evit rouantelezh Navarra, hag implijet an oberoù ofisiel gant meur a gargaed e toledoù zo betek an Dispac'h Maur, "Mère des peuples" a fougase Hugo, Hugo hag a skrive diwar-bann tud Breizh-Izel "ils parlaient une langue morte qui faisait habiter une tombe à leur esprit" (e "93") ; Hugo a zo e Oberennoù Maur hag Uhel-Awenet war roll an danvezioù evit an DEUG okitaneg...


Emmanuel Legent.

Katalaneg

D'an 3 a viz Kerzu, e sal an Akad Skol Veur ar Sorbon e Pariz e voe graet he c'hentel-digor gant an Il. Maris-Claire Zimmermann, nevez anvet da gelenner-yezh katalaneg er Sorbon. Evit ar wezh kentañ ez eus ur gador-gelenn katalaneg e Pariz. Ur saliad tud a oa deut da selou ar gelenner-yezh a gomz eus Ausias March, unan eus penañ barzhez katalaneg (gand e Gandia e 1397 ha marv e València e 1459) Evit gwir e oa bet Ausias March ar skrivagner pouezus kentañ o skrivañ e katalaneg, rak dre vras e veze graet gant an okitaneg a-rak.
Displeget e voe gant ar gelenner-yezh zezen war mouezh "poématique" ar barzh. Tro he deus bet vez da gounañ ez eo katalaneg (un eñstumm anezhañ eveljust) a gomzer e Bro València ha neket ur yezh disheñvel. Ez ofisiel e vez komzet eus "Valansianeg" (Valencià) gant pennaed-yezhioù ar Gumuniezh Emren, dre abegoù politikel nemetken, o vont enep an adurezhij.
Deut e oa an Ao. Laporte, kuzulier deskadur-yezh er "Generalat de Catalunya", da lavarout eo ur gwir maodiern (anvet "M. le Ministre" e galleg d'an deiz-se end-aeur).

An It. M.C. Zimmermann ha deus desket katalaneg er Cerdanya (Katalonia an Hanternoz) daoust dezhi bezañ ganet e... Brest.

Gw.E



Kartenn 7 rannvro Okitania

Faskour an Drinded

Arabat trec'hiñ Gouenn

Emañ faskour an Drinded o paouez dislonkañ e ginnigoù a-benn skoilhañ ouzh an hironerezh. Rebechiñ a ra d'an ekologourien disofijal ez eo ar ouenn wenn war var da vont da get. Hervezañ ez eo bet krouet ar

gouennoù gant Doue hag ur pec'hed eo meskañ hêrezhioù gênel disheñvel. Ne glaskin kompren peseurt mennadoù a zo gant roue an neñv.

Evidon da vezañ bat ganet e Bro Leon ha da zoug an anv sant paeron an eskopti, an hanter gernevad a zo ac'hanon n'eo ket evit ul leonad penn kil ha troad da gas un hevelep labour da benn. Spig eo an debronn duañ paper ennon a-benn klask diskar seurt menozioù war tachenn ar skiant. Abaoe mare hor gourdadoù goshañ, n'ouspet milved'zo, emañ ar gânoù o kantren eus an eil penn d'egile d'an douar. Ewel just ez eont kalz buanoc'h hiziv an deiz dre veajiñ gant ar c'hirri-nij hag an trenioù eget gwechall pa veze ret implij an treid pe ar c'hezeg pa save c'hoant divroañ. Diskennidi arabed a zo en hon touesk abaoe pourmenadeg ar vuuzumidi betek Poitiers e 732 hag emañ Mohammed un tu bennak war kevrank Loëiz XIV. Daoust da beaj diastal ha milvedel ar gêmoù, ez eus chomet disheñvelderioù etre an dud. Estreget biz Doue a zo e-barzh an afer-se. Marteze ho peus merzet e teu gwennoc'h krochen an dud a feur ma skoer war-du an Hanternoz. Un dibaberezh dre an droug-lec'h a zo kiriek da se. Arabat disofijal, o deus bet hon hendadoù da c'houzañv n'ouspet naonegezh, n'ouspet kernez ha pa veze a-walc'h a voued evit magañ an holl, ne veze ket atav danvez ar meuzioù evit tec'hiñ lod ezhommoù. An diouer a vitamin D eo a oa kiriek d'an droug-lec'h. A-benn parañ ar vugale a veze spig enno ar c'hlevved-se, ez astenned anezho, noazh, e lagad an heol pa zegase e skinoù ar vitamin D, ar vitamin a fazie d'o c'horf. Seul teñvaloc'h ar c'hroc'hien, seul nebeutoc'h a vitamin a dizhe o fal hag abalamour da se, seul uheloc'h ar vro, seul wennoc'h krochen o annezidi. Ur boôl eus an hanternoz pellañ na 'z eas ket da wenn he c'hroc'hien koulskoude, an Inuited, pa veze debrat ganti forzh tammoù kig pesk kriz, ur boued a oa ennañ vitamin D a-walc'h evit tec'hiñ an ezhom.



N'emañ mui al lezenn ekologel-se o talvezout en ur mare a vez tu en e bad da gargañ an taolioù gant meuzioù a-bep-seurt. Arabat d'an danvez-kerent hironed kaout aon rak an droug-lec'h. O bugale a vo ken yañc'h hag ar re all keit ha ma chomo dister levezon blejadennou Jean-Marie la Tête. Paol ar Meur

Aozet 'vo a-benn ar 25 a viz Genver 1992 ur Vanifestadeg e Pariz a-enep ar gouennelouriezh hag ar faskouriezh. Bretoned a gemero perzh er manifestadeg-se a gevret gant strolladoù politikel ha sevenadurel evit an UDB, Emgann ha Skol an Emsav. M'ho peus c'hoant diskouez ho youl da lavarout nanin da strolladoù menozioù an tu-dehoù pellañ ganto, deuit 'ta niverus ganeomp a-hod abredoù Pariz. Lec'h Emgav : Metro Breguet-Sabin adalek 14e. Pellgomz (1) 39-87-31-64.

Pennad kaoz gant Mark Guillou, Prezidant Ti Ar Brezhoneg, da geñver Emdod meur ar gevredigezh

4 bloaz zo eo digor Ti Ar Brezhoneg e Pariz. Petra eo bet betek hen efedoù labour TAB war buhez brezhoneg Enez Frañs ?

Ur mare a zo bet ne veze nemet ar c'hentelioù hag ar beilhaedegoù aozet gant Ti Ar Vretoned pe Ti ar yaouankiz evit reiñ tu d'ar vrezhonegerien chomet stag ouzh o yezh d'ober anaoudegezh an eil gant egile. Kalz brezhonegerien an eil gant egile. Kalz brezhonegerien an eil gant egile. Kalz brezhonegerien an eil gant egile.

n'eo ket kreñv ar stal ganeomp, ne c'hellomp ket, anat d'an holl, hen ober alies. Ma'z eus e-touesk lennerien Bremañ, tud darev da gaozael war an danvez mañ danvez hag o dije digarez da dremen dre bariz da geñver un dibenn sizhun, e vint deuit brav ganeomp.


Fenaoz e vez an traoù gant ar beilhaedegoù aozet gant TAB bep gwener da noz ? Baz e vez peurliesañ etre 10 ha 15 den. Plijadur a zo. Tu a zo da bakañ koan, da evañ banneoù an davan, da c'hoari biroù bihan, da sellout ouzh abadennoù FR3, da salaeu re RBL hag evel just re Radio Bro (Radio Bretoned Pariz)

Evit ar wech kentañ ez eus bet pedet un emsaver da brezegenniñ en anv ur strollad Politikel, Petra eo emzoug TAB e-keñver ar bed politikel ? Distag eo TAB penn da benn diouzh an holl strolladoù politikel, ha pa vefent breizhek pe c'hall. N'eo ket serr hon dorioù koulskoude ouzh an emsaverien a faoi dezhe kinnig menozioù ha labour o strollad, gant ma ne vint ket a-enep an demokratelezh.

Fenaoz e klaskoc'h sachañ muioc'h a dud davedoc'h ? En ur lakaat ar pouez war ar brudañ. Divizet ez eus bet digeriñ standoù da geñver gouelioù bretoned Enez Frañs. Kendalc'het e vo mod-all da c'houlenñ digant kelaouennoù ha radioloù ar vro,

brudañ hol labour. Tizhet ez eus bet diaj tud e-giz-se. Aozet ez eus bet abadennoù evit stajiñ KBDP e TAB. Pesañt liammoù a zo etre an div gevredigezh ? Holl gelennerien KBDP a zo izili oberiant eus TAB. Un dia a bouez eo lakaat ar stajiñ da c'houzout ez euz ul lec'h e-giz TAB an Enez Frañs evit implij ar pezh o deus desket e-doug ar c'hentelioù. Araokadennoù eus ar brasañ a vez graet gant ar re a zarempred an ti war lec'h, dreist holl evit pezh a sell ouzh ar c'haezeal.

Fenaoz e welit amzer dazont TAB hag hini ar brezhoneg an Enez Frañs ? Hag eñ n'eo ket deuit ar brezhoneg da vezañ ur seurt simant sokial en ur goaded darnpredoù etre amezeñt ? Abagoù liesseurt a vroad an dud da zerc'hel da savenadur o bro orin en Enez Frañs. Arabat ez ale TAB da neizh klot. Ret eo lezel digor frank dorioù an ti, sachañ muioc'h a dud daveñt. A drugarez dezhañ ez eus bet stummet forzh brezhonegerien nevez hag e vo stummet ganto reoù all pelloc'h. Tizhet ez eus bet zoken tud na oant mui kustum d'ober gant yezh o bugaleag hag a zo an em lakaet warni en dro dre zarempredañ an ti. Start e vo al labour met dre c'hafas ez eus youl ganeomp. Keit ha ma vo eus TAB e vo ar Brezhoneg ur yezh bev-buhezek e Diaspora Pariz



Gouel e Ti ar Brezhoneg


Brezhonegerien, studierien war ar brezhoneg m'ho peus c'hoant da : gomz brezhoneg e Pariz gwelout filmoù e brezhoneg bep sizhun amprestañ kelaouennoù, levrioù, kasedigoù e brezhoneg kaout prezegennoù a bep seurt e brezhoneg heuliañ kentelioù Kan ha Diskan pe urzhialaerezh e brezhoneg evañ ur banne pe debrñ un dra bennak gant brezhonegerien all (...ha kalz traoù all c'hoazh !!!) T.A.B. a zo evidoc'h neuze Ti Ar Brezhoneg 15 Straed des Tourelles 75020 PARIS PG : 43.64.63.33 3614 Chez'Lizhertab Digor bep gwener adalek 19e30.

An Adkorfadur Eus an eil buhez d'eben

Anat e teu d'an holl n'emañ mui ar relijion gristen e par he brud er vro. Kredennoù all a zo o klask en em silañ e spered hor c'henamzeridi. An adkorfadur en o zouezk.

Hervez feizidi an adkorfadur e rankomp mont gant un hent stummet gant buhezioù leun a skoilhoù da lammat dreisto, a-benn tizhout stad uhelañ ar spered. Tonket omp hervezo, ouzhpenn-se da c'houzañ efedoù hon drougoberioù chomet digastiz da geñver hor buhezioù kent, e-kerz hor buhezioù da heul: Ar re bet bourevien da vezañ boureviet, ar re bet gwallerien da vezañ gwallat, ar re bet jako-binourien penn Kil ha droad da c'houzañ an dispiz evit yezh o buhez nevez (marthez emañ Jules Ferry o kelenn en ur Skol Diwan), ar re bet Marlonk da vezañ saoz, ar re bet riboulerien da vezañ mibien mollahed eus an tu Islamour pellañ hag all...

pezh omp deut a-benn da c'houzout diwar-benn relijionoù koshañ hor bro, lejjonourien roman pe bourc'hizien yuzev da vare Jezuz-Krist



Diwall Yann Var! Ne vi ket melegan ez puhez a zeu
Nuspout levr a zo bet embannet war an adkorfadur, alies hentennoù evit klask piv e oad. Displeget e vez enno da skouer penaos dielfennañ danvez hon huñvreoù a-benn kavout penn dezhi. Graet e vez ivez gant an teogin hag an dud da zanevellañ dre ar munud o buhezioù kent pa vezent o vrezeliñ en armeoù an Inka pa e-touesk ar Chouaned, pa vezent beleien un douez heneuz eus Bro Atlantis (ret e vo deomp diskoachañ unan bet drouz pe Saver Peulvanou). Eus an pouezuzañ e vo seurt testenioù evidomp, gant an dister mar deo an

(darempredet tre e veze a-dra-sur biojoù Jeruzalem d'ar mare se rak ur bern tud lakaet e stad an teoghun, a lavar bezañ startet e dorn d'ar salver), likizien pe medisined e lez Roue Bro Frañs pe an hini Roue Bro Saoz (ne oa ket enk war a seblant paleziou ar roueed-se rak ur mor a dud a oa bet o stramif dre o zrepasoù da geñver o buhezioù kent). Ne vez ket kavet kalz a dud e barzh seurt testenioù hag a zeu soñj dezho bezañ bet troc'herien buzhug. Padal e veze kazi an holl o plediñ gant ar vicher-se e doug ar c'hanvedoù paseet.

Piv a zo bet Roue Arzhur ? ma teulo an droug da wir

Petra bennak ez eo souezus lod testenioù memestra, on bet lakaet diass gant un hevelep kredenn abalamour da gresk ar boblañs war an douar. Da vare ar romaned ne oa nemet 133 milion a dud o ruzañ o zried war hor Planedenn. Ret e a dud, Ha warlerc'h, e korf ur mare eus ar re verrañ en Istor Mabden, eo set ar genel da grefhoc'h kreñvañ = 2 villard e 1930, 4 villard e 1975, 5 villard e 1987. A-dra-sur e vo tremen 6 villard e 2000 ha marteze 8 villard e 2015. Mar deo an eneoù a oad an eil gant egile evel ma lavar feizidi an adkorfadur, ez eus peadra d'en em c'houllenn hag a-walc'h a vuhezioù a oa bet en prantadoù paseet evit kement a dud. Ma n'eus ket eus an amzer er Bed Hont evel ma vez displeget en doueedoniz keltiek, ez eus tu da respont d'un hevelep goullenn (hag ar gwir a vefe gant ar Gelted ouzhpenn-se) bez e c'helle bezañ neuze lod buhezioù kent en amzer dazont. Ar pezh-zo, n'eus testeni ebet evit kadarnaat ma martezeadenn Kenavo ur vuhez all.

Paol ar Meur
(Bet Salaun Roue Breizh a-barzh bezañ Loeiz ar Rannieg a voe talvezet din en e vuhez munt Erizpeo).

Expolangues 1992

Stand ar brezhoneg e Bro C'hall

Bez e vo tu adarre, da geñver 10vet deiz-ha-bloaz Expolangues, dalc'het eus an 12 betek ar 16 a viz C'hwevrer 1992 e Dor Versaillez, liammañ darempredoù niverus hag en em ditouriñ. Fiziet ez eus bet evel warlene gant Skol-Uhel ar Vro da gevredigezhioù Bro-Bariz, da lavarout eo, Ti ar Brezhoneg, Kelennerien war ar Brezhoneg en Deskadurezh Publik (K.B.D.P.), Emglev Sevenadurel Breizh, Radio-Bro, Diwan Pariz, sevel ar stand ha reiñ startijenn dezhañ ha kement-se gant sikour Kuzul Meur Penn ar Bed emc'hañs.

Kalz bravoc'h ha souezhusoc'h c'hoazh e tefe bezañ ar stand-se eget hini ar bloavezh tremenet. Pep tra pe dost 'vo kavet ennañ: levrioù pedagogel, lennegezh, danevelloù, titouroù a bep saurt, ha dreist-holl titouroù diwar barn ar geriadur holvrezhonek da vezañ embannet gant An Hara, kasetennoù-video FR3 ha Diwan, stad an deskadurezh hag ar panellou-hent divyezhek, darempredoù gant dileuridi ar c'hevredigezhioù, chomlec'hioù liesseurt ha c'hoazh mignoned ha kenvidioù a grabanadoù. Neuze 'ta, arabat deoc'h mignond war saurt degouezh dibar.

Marc Guillou

"Gavr ' Inis" gant Roland Becker

Das eo bet deomp gortoz un tamm mat a vloavezhioù evit selaou un enrolladur nevez gant Roland Becker. Goude "Fallaen" e bladenn gentañ, ar "c'hlasker-son" a oa chomet mut, pe dost; gwir eo e veze klevet amañ-hag-aze sonerezhioù bet skrivet gantañ evit ar gouel-mañ-gouel pe evit ar festival-mañ-festival. Oberenn ofisiel ha klok (ma'z eus tu da sevel traoù klok) ebet.

"Gavr ' Inis": un titl a-zoare, evit ul labour a chomo evel ur maen-bon war hent hor sonerezh. Betek-henn e talvez ar gerioù-se evit savadur brudetañ pleg-mor Bro-Wened; kement hag evit ar savadur e talvez ar gerioù-se da arouez evit sevenadur kevrinus hon hendadoù koshañ. E-keñver sonerezh e talvez ivez da dit un ton-bale bet savet gant Alan Stivell evit sonerien Bagad Bleimor. E-ber n'int ket gerioù da implijout evit forzh petra!

Marse n'eus bet ur soner pe ur muzisian o vont ken pell en e furchadennoù war tachenñ ar son, pe hini ar c'houblañ sonioù pe sonilvioù, e Breizh. Lod a lavaro: "kredet en deus e ober". "Ya, kredet en deus". Boas e oamp da selaou traoù dreistardinal gantañ; ne oa netra e-keñver "bedoù muzikel pe sonel Gavr'Inis". Kredet en deus-er; met, piv a gredo bam an oberann en he fezh? Rankout a rafen lavarout: "Piv a vo gouest da varn anezhi?" Aze emañ an dalc'h. Oberennoù zo, a-wechoù, na c'hellont bezañ priziet penn-da-benn nemet gant un nebeud hiniennoù. Kudenñ beurbadel ar c'hrouer. Gant "Gavr ' Inis" e tiskouez skiaer ha splann, Roland Becker, emañ war ur blanedenn all, e-barzh ur Bed all; nemet ma vije, ur wech ouzhpenn kant lev war-raok. Ha dre-se, neuze, digomprus evit lod.

Rebetchet zo bet dezhañ, a-wechoù, skrivañ pe sevel tonioù re speredel, ijn ur sonerezh ne "intelektualek". Siou ar c'hrouer er penn-kentañ. Ar wech-mañ, evel ma lavare Mozart, n'eus ket re a nolennet pe re nebeut: an niver mat al lech mat ne lavaran ket III Eru eo ar muzisian de var; dre-se e vez anavezet ar re vras! Bedoù sonel a bep saurt, prantadoù jazz gwir e prantadoù lakis, evel sonilvioù o tont eus donder sonerezh Pink Floyd, Klaus Schultz pe Klaus Nomi, prantadoù all, hervez an "Hengoun", o tiskouez splann e wriziennoù: sonerezh ar Bobl. Traoù zo na c'heller ket bezañ toulliet gant o liv pe o spered: un "Hengoun", o tiskouez splann e wriziennoù: sonerezh ar Bobl. Traoù zo na c'heller ket bezañ toulliet gant o liv pe o spered: un "Hengoun", o tiskouez splann e wriziennoù: sonerezh ar Bobl. Traoù zo na c'heller ket bezañ toulliet gant o liv pe o spered: un "Hengoun", o tiskouez splann e wriziennoù: sonerezh ar Bobl. Traoù zo na c'heller ket bezañ toulliet gant o liv pe o spered: un "Hengoun", o tiskouez splann e wriziennoù: sonerezh ar Bobl.

evit gouzout hag-eh en deus bet ar muzisian tro da selaou ha da gompren sturm koshañ ar sonerezh: ar c'han an hini eo. Tachet e vo an dud da soñjal en ur bladenn vombard gant prantadoù saksolon lipet mat. N'eo ket. Kalz muioc'h evit-se eo; un oberenn soñjet eus ur penn d'egile. Un hollad eo, ha tamm ebet un heuliad tonioù en dizurzh pe diliamm.



Eilennoù stag an eil ouzñ egile dre an tam, ar son pe ar c'hempenn. Ur sonerezh bet savet gant ur soñj muzikel uheloc'h evit prederiadennoù hiniennel pep benveg. Emañ pep benveg-sonerezh e servj ur soñj ha n'eo ket ar c'hontrol evel ma vez klevet re alies gant teknisianed ar benveg-mañ-benveg, a zisoñj pal uhelañ holl zoareoù ar sonerezh evit

kinnig un teknik mestroniet mat e-lec'h sonerezh rik. Petra lavarout a-hend-all? Kement a draoù a vefe da gontañ! Arabat koll amzer evit klask prouñ barregezh e vuizianed! Selaout, setu tout! Evit bezañ bet tro d'e anavezout, pell zo, e ouzon mat-be n'eo ket den da implijout forzh piv! Muzisianed ampart, sonerien ampart! Evit, ivez, emañ skiaer ar pal: servj, gant o barregezh, krouidigezh un den n'en deus ket disoñjet e levezonoù kentañ, ha drezañ hor sonerezh; dre ma ne c'hell den enebñ ouz ar mennozh-mañ: sonerezh Roland Becker, daoust dezhañ bezañ a dalvoudegezh holvedel, a chom breizhek, dre al livioù, al lusk, ar ritm, ar mentadoù. Ur ger diwar-benn al levrig. Don eo levezon an doueedoniz war spered R. Becker. Prederiet eo a-hed e oberenn gant pouez an enebadur Tremened/Dazonit hag e dalvoudegezh filozofel. Seblantout a ra gefal darvoudoù o tont eus nerzhioù dreistardurel pe donderioù kuzh spered Mab-Den. Ha ma vefe ar sonerezh e zoare da gastañ ur Bed gwelloc'h, pe pal hor bezañ war an Douar? Gantañ emañ ar respont. Deomp, branañ, da glask bezañ tizhet en hor c'hreiz gant a sonioù pe e zaskrennoù. Klask; peo-gwir ne vo ket aas. Ret a vo deomp selaou ha selaou c'hoazh. Pap gwec'h e krog ar c'hest an-dro gant ur sell nevez, kement a binvidigezh zo e-barzh pep allenn, e-barzh pep ton, ma'z eus tu distag unan drouz ar re all. Gantañ klaskomp, mat da gastañ selaouomp, gant dantegezh ur bugal nevez gant zoken. Dalc'homp soñj gantañ, ez eus meur a zoare da soñjal en Dazonit, pep hini anezho gant a binvidigezhioù, hini ebet anezho o vezañ distag rik

eus an Tremened.
Trugarez dt Roland I
Patrig Corisy
Roll ar bladennoù deuet er-maez: "Fallaen" - "Inis, notre Inis" - musiquies bretonnes compilation - "Barzhaz Breizh" - "Tu pe du" - Kevrenn an Ales, renevez - R. Becker - "Kisipoù" - "Barzhaz Breizh", kêrioù Pondivi, Roazhon; Kuzul jenerali ar rannvro.

Mouezh Sant Erwan

Bodadeg Prad : 28 a viz Du 91

Biskoazh n'omp bet ken niverus a gredan en dro d'an daol. Gwir eo e oa bet kouviat en nebeut mignoned, beleien ar parrezioù tro-dro, hag emsaverien gant Anton Ar Barzh, person ar barez.

Met da gentañ e voe graet labour. Alan Bienvenu, bet rener an abadennoù brezhonek war FR3, ha roet e sach gantañ da servij gall ar skinwel e dibenn an hañv, en deus bet graet ur gaozeadenn dimp diwar-benn an ofis evit ur skinwel breizhek emañ e-sell da sevel, a-benn pourchas abadennoù d'an estrenvro, ha da dreiñ abadennoù estren (gall, amerikan, iwerzhonat, kembreat, hag all) e brezhoneg.

Er vodadeg kentañ graet e Kewen (Morbihan) e oa deuet un 70 bennak a dud, tud prevez hag embregerezhioù dedennet gant ar mennad. Ur raktres arc'hant a zo bet graet gant Alan Bienvenu hag e skipallit. Gant sikour ar chuzul rannvro, an embregerezhioù ha Brussels marteze, e vije tu da sevel ur seurt ofis. Ezhomm bras hon defe anezhañ en Europa a-vremañ, rak pa weler pegen dister eo plas ar brezhoneg war FR3 Breizh, ha pegen dilufr danvez chadenn ar vro, pa verzer ouzhpenn emañ ar stadoù kreizennet o vont da goll (an Unvaniezh soviedel, Yougoslavia, dismantr, diframmet) ez eo un dra a bouez diskouez a-wel d'an holl e feil d'ar Vretoned bout ur vroad evel ar reoù all er c'henvarc'had. Ur vroad evel Slovenia, Kroatia pe Litwania. Hep ar reuz a zo enno mar bez posubl. Perak an tri c'hant mil a Luksembourgiz o deus ur vouezh e kumuniezh amerc'hel Europa (ar CEE, gouez d'ar c'hallaoued, pe an EEC, gouez d'ar saozon), hag an tri milion ar Vrezhonek hini ebet ? Arabat dimp bout ken mevelien dindan mistri dinatur.

N'eo ket hepken selaou prezegennoù eo a rejomp avat. Merennañ a-gevret da zigentañ ne lavaran ket, ha goude ar prad e voe kaset al labour war-raok en ur echuiñ troidigezh an bedenn-veur helvatiat evit ar bodadegoù (liizadoù) bras. Start a-walc'h a voe echuiñ rak pa vez dek den asambles o lavarout o soñj war ar yezh en ur vurutellat an destenn ouzhpenn-se war dachenn ar feizonezh, e vez dek all disheñvel, hag ar c'henuzhiar (me, safset...) ne oar ken gant pesour hent mont...

Yann Talbot

Skol veur Roazhon :

Rann ar studioù keltiek

Peogwir am bez digarez hevlene da vont da skol-veur Roazhon II evit heuliañ kentelioù e rann ar studioù keltiek, am eus bet tro da gaout digant L.Kergoat, rener ar gevrenn, sifroù azivout niver ar studierien enskrivet e 91-92 evit deskiñ brezhoneg pe ar yezhoù keltiek all (kembraeg, iwerzhoneg, kerneveureg).

Evit an DEUG I : 72 studier. Met sevel a raio ar sifri c'hoazh. Evit an DEUG II : 62 studier. Evit An Actregezh : 48 studier. Evit Ar Vestroniezh : 20 studier. Evit an DEC (Diplôme d'études celtiques) : 16. Evit an DEA (Diplôme d'études approfondies) : 3. Evit an Dokorelezh : 3. En holl : 224 studier.

Gant se emañ eta ar gevrenn keltiek er pevare plas er skol-veur evit ar yezhoù (war-lerc'h ar saoneg, ar spagnoleg, an alamaneg), hag an trade renk evit ar pellegennerezh (enseignement à distance).

Well-wazh e chom niver an enskrividi war an hevelep live a vloaz da vloaz ■

Ur c'hapes evit netra ?

P'emañ ar c'hatalaneg o vont war-raok en Deskadurezh, gant krouidigezh ar c'hapes katalaneg er bloaz-mañ, e c'helle bezañ diskaret penn-da-benn gant nevezadur ar c'helenn en eil derez, a lavar an aozadurioù a zilenn ar c'hatalaneg. Ar c'hapes katalaneg neuze ne servije da netra. Kemend-all evel just zo o vont da c'hoarvezout gant ar yezhoù all, hag ar brezhoneg evel just ivez. Betek-hen, e Breizh, n'eo ket bet kalz a drouz c'hoazh. Bez emañ UGB e soñj kregiñ gant ar stourmad e dibenn mit Genver.

M.K.

Lennit al liamm Skrivañ da AL LIAMM 16 straed des Fours à Chaux 35400 - SANT MALO - Koumanant bloaz 150 lur (studierien, tud dilabour 100 lur)

Yann Talbot

Goulenn er Sened

Gant Edouard Lejeune, Senedour Penn ar Bed, ez eus bet gouennet ouzh Ministr an Deskadurezh Petra emañ o vont d'ober evit echuiñ gant o diaezamantoù a vez graet d'ar brezhoneg er skolioù, ar re a zo bet gerent, daoust da gomzoù ar Pap a-du gant difenn ar minorelezhioù, ar sevenadurioù en arvar ha gwirioù, ar peogwir ne respote ket zoken DDEC 56 d'e lizheroù. Un emgav e oa da gaout etrezañ ha Tugdual Kalvez, kadoriad UGB (unvaniezh ar gelennerien brezhoneg) gant eskob nevez Gwened. F.M. Gourvas. Ne ouzon ket c'hoazh, an deiz ma skriverzan an destenn-mañ, pesour disoc'h a zo bet pe a vo d'an emwel. E gwirionez e weler mat ez eo aet a-du krenn ar skolioù kristen e Breizh gant politikerezh gallekaat ha mougañ ar stad c'hall. "Francophonie" me hoc'h ador, c'hwil eo ma Doue da virviken !! N'eo ket ganto e vo savet bepred Europa ar pobloù, met Europa ar waskerien. Gwir eo, ar pezh a gont ar muiañ evit ar skolioù kristen e Breizh n'eo ket lakaat an aviel da dalvezout met stummañ tud a-du gant ar gevredigezh a-vremañ. Diouzh e du DDEC 22 ne fiñf ket. Cortoz a ra ma vo marv ar brezhoneg evit ober ar brezegenn ganv war an ton bras.

Slask war testennoù sonskrivet gant Anjela Duval

Er bloavezh 1972 e oa bet Roger Laouenan meur a wech o welet Anjela Duval evit he sonskrivañ o kaozeal diwarbenn he buhez dre vras ha diwarbenn he mennozhioù. Meur ha meur a eurvazh sonskrivañ a oa graet evel-se gantañ. War ar sonskridoù-se eo bet diazezet lod kaer eus al levr skrivet diwezhatoc'h gantañ e galleg, anvet "Anjela Duval" hag embannet e 1914. Loc'het ez eus ganin e 1991 ur sonskridaoueg anvet "Marvailloù" enni un dek niverenn bennak dija. Plijout a rafe din ober un niverenn a-bez, hag ur c'hasadig a dro 55 munud asambles, gant mouezh A. Duval. Testenn skrivet ar sonskridoù-se a zo bet liziet ennon gant R. Laouenan.

An dalc'h eo ne gav ket ar sonskridoù ken. Bezañ e oa anezho ur guchenn kasedigoù. Ha ne wel ket en holl petra e velenf deuet da vezañ. Daoust hag unan bennak en Emsav a oar e pelec'h emaint, pe en deus ur mennozh bennak war betra int deuet da vezañ ? N'emaon ket o klask o c'haout evidon, met al sonskrivañ hepken d'ober ur c'hasadig mamm. Pa ouezer pebezh brezhonegerez vat e oa A. Duval, peched e vefe ne vefe ket posupl d'an holl ac'hanomp kaout un testi eus he mouezh. Pe neuze daoust ha gant tud all ez eus pennadoù-kaoz hirik graet gant Anjela Duval ? Roñt da c'houzout da : Mikael Madeg Karedol 29800 S.Touan

Levrioù

Nevez deuet er-maez gant Embannadurioù Al Lanv

"Yann-Vari Perrot Istor ur pezh c'hoari" 90 lur an tamm + 15 % frejup-post da : Al Lanv - 59, hent Kerdrionn Vihan - 29000 Kemper. (200 pajenn). E 1984 hag e 1985 eo bet savet ar pezh-c'hoari Yann-Vari Perrot gant Strollad ar Vro Bagan ha c'hoariet d'an 12 a viz Kerzu 1985, evit ar wech kentañ, e c'hoariva Montroulez. Amañ el levr-mañ, e kavor istor ar pezh-c'hoari. A zo gwelloc'h c'hoazh, Buhez ar pezh-c'hoari. Krouiñ ar pezh : mont e-touez an dud da zastum eñvorennoù ha soñjezonu an testoù ; furchal pizh e-mesk ar paperoù kozh ; pennaouiñ ha didoueziañ ; en em vodañ evit sevel ar pezh e-ser choari... Skrid ar pezh-c'hoari : taolet da vat an destenn hag ar c'homzoù war baper ;

ha da houl, ar c'hoari, petra c'hoarvez war al leurenn. War-lerc'h ar skrid : ur guchenn notannoù da aesaat kompren ar c'hoariadenn... Ar c'hoari dirak an dud ; ar blijadur hag ar reuz a sach ar pezh war e lerc'h. Tud a-du, tud a-enep... lizhiri, pennadoù-skrid er c'hazetannoù, divizoù da heul ar c'hoari... Skouerius e chomo Yann-Vari Perrot, douetus-bras, e-keñver ar c'hoariva brezhonek engouestlet. O tiskouez talvoudigezh ur seurt c'hoariva e buhez hor c'hevredigezh...

Goulc'han karvella "Ne vez ket gwelet alies pezhioù-c'hoari o krouiñ fedoù kevredigezhel, bezañ elfennoù hag a laka ar gevredigezh, pe ar speredoù enni kentoc'h, d'an em dreiñ en ur reiñ lañs d'un diviz 'yaus' a oa ezhomm dioutañ". Ivon Gag.

BREUJOU BREIZH E ROAZHON SUL 12 A VIZ GENVER 1992 Sal ar Site straed sant Loiez

gant Andre POCHON (labour-douar) Denez L'HOSTIS (pesketaerezh) Jean-Claude PIERRE (endro) Yves LAINE (Rener BAI) Goulc'han KERVELLA (Rener c'hoariva) Per DENEZ (Kelenner skol-veur)

eus 10e30 da 5 eur g.k. pred da greistez hanter Kenaozet gant listennoù "Pobl Breizh, Ur Bobl en Europa" (Emgann, UDB, Pobl, Frankiz Breizh)

**Kreizenn
Arzoù Pobl**

Kreizenn Arzoù Pobl Brest a ginnig deoc'h stajoù e-kerz miz Genver 1992 : kentelioù flëüt, dansoù, kan ha diskan, violoñs, akordeoñs h.a.

Da zibab 'zo !

Skirvivañ pe pellgomzit da Greizen an Arzoù Pobl, 37 bis str V. Hugo, 29200 Brest, pellgomz : 98 46 05 85.

Da brofañ

Ur c'hasedig hag ur bladenn lazer a zo bet savet nevez'zo gant Berc'hed Baronnet, renerz Telenn Kastell-Briant, a vod endro dezhi ur pemzek a vugale.

Setu aze enta un aridennad kanennoù keltiek ha sonaozadurioù nevez eilet gant an delenn. Emañ Berc'hed o weañ, e plañsonennoù livek, son he mouezh ha kan an delenn diwar-benn danvezioù tost d'he c'halon. Ar sonaozadurioù nevez-mañ a zo awenet rag-eeun gant an hêrezh sevenadurel breizhek ha gouezelek. Levezonet int don ivez gant doare nevez an arzourez da zegemer froud ar bed bev adalek lec'hioù uhel an amzer dremenet, Brekilien hag ar menez Mikael da skouer. Kavout a raer aze ur skoazell dibar ha birvidik da grouiñ aergelc'h ur fest-noz.

Titour : skrivañ d'ar gevredigezh "HEOL" 44520 Moisdon-la-Rivière. Priz ar c'hasedig : 80 lur an tamm, ar bladenn lazer : 110 lur. Na zisionjit ket stagañ 10 lur ouzhpenn evit ar frejoù-kas.

P.K.

Bep daou viz lennit

AL LANV

59 hent Kerdonioù Vihan
29000 Kemper

Koumanant bloaz : 100 lur
Skoazell adalek 130 lur

Kaozeadenn

Kinnig a raio Kreizenn Sevenadurel "Roparz Hemon" ur gaozeadenn e brezhoneg diwar-benn "Ar gontadenn e Breizh".

Jef Philippe eo a raio lañs d'ar gaozeadenn. Deuit niverus eta d'e glevet d'ar Yaou 30 a viz Genver 92 da 8eur hanter da noz, Plasenn Verdun, Gwengamp.

Festoù-Noz

**Sadorn 25
a viz Genver**

Fest-noz d'ar 25 a viz Genver 92 e Carec azot gant Min Ran.

Gant ar strolladoù

Retrait de Permis ha Entree Gratuite
Sonerien Jaguin-Chapelain
Kanerien Guilloux-Ebrel

**Sul 26
a viz Genver**

Fest-deiz ar miz ar Greizenn Sevenadurel "Roparz Hemon" (Plasenn Verdun, Gwengamp) a vo d'ar Sul 26 a viz Genver 1992, adalek 2eur G.K.

Kaset e vo ar fest-deiz da benn gant :
Ar ganerien : Alain Leclère / Jean-Paul Talec, ar Sonerien : Gilles Lehart / Daniel Feon, ar Soner adkordeoñs : Philippe Ollivier

Evel boaz, e vo peadra da zebriñ ha da evañ : kafe, krampouezh hag evajoù.

**Sadorn 15
a viz C'Hwevrer**

**Fest-Noz ramz Skoazell Dudi
Pabu (Gwengamp)
Sal nevez Pabu
15 a viz C'hwevrer 92**



gant 29 soner ha kaner

Strobinell
Carre Manchot
Ar Re Yaouank
Retrait de Permis
An Duo Veillon-Riou

Ar ganerien
Ar Vreudeur Morvan
Annie Ebrel - Marsel Gwilloux
Jando Robin - Klaod an Intañ
Nanda Troadeg - Jakeza al Lay

Deuit da sikour Dudi (kreizennoù dudi e brezhoneg evit ar vugale)

TAOLENN

Lizhirl2
Manifestadeg SAB3
Prezegenn.....4
Panellou-hent5
Berr ha berr6
Etrevroadel7
Kelenn.....8
Diwan St Nazer9
Teullad ar miz.....10-11
Okitania.....12-13
Faskouriezh.....14
Ti ar Brezhoneg.....15
An Adkorfadur.....16
Expolangues.....16
Sonerezh.....17
Berr ha berr18-19
Kemennadennoù.....20

Maketenn gant Jean-Michel Roynard ha Lena Louarn

Luc'hskeudennoù gant Gireg Konan, Klaod an Duigou, Lena Louarn, Gw. Emelyanoff, Télégramme.

Skoazell difazlañ gant Olier ar Mogn

Ar pennadoù gant Iwan Kadored, Herve Kerrain, Loeiz Mahe, K. an Duigou, Lena Louarn, P.V. Kerloc'h, Yann-Varc'h Thorel, J.Y Le Touze, Serj Richard, Laorafs Motrot, Emmanuel Legent, Hegareg, Gw. Emelyanoff, A.V.C., Paol ar Meur, Marc Guillou, Patrig Corlay, Yann Talbot, M.K., Mikael Madeg.

Renerez BREMAÑ : Lena Louarn

Skrivit e-barzh BREMAÑ ! Kasit ho pennadoù war baper, pe pladennig (na zisoñjit ket al luc'hskeudennoù pe tresadennoù)

a-raok an 2 a viz C'Hwevrer

Diwallit ! Cheñchet eo priz ar c'houmanant : 180 lur ar bloaz (12 niverenn) da Vremañ, 8, str Hoche, 35000 Roazhon.

Trugarez !